

KENVREURIEZ AR BREZONEG

N^o 28



T A O L E N N

89

89.....	I4	ha	I5	sul	war	ar	bloaz
90.....	I6	ha	I7	sul	war	ar	bloaz
9I.....	I8	ha	I9	sul	war	ar	bloaz
92.....	20	ha	2I	sul	war	ar	bloaz
93.....	22	ha	23	sul	war	ar	bloaz
94.....	24	ha	25	sul	war	ar	bloaz
95.....	26	ha	27	sul	war	ar	bloaz
96.....	28	ha	29	sul	war	ar	bloaz
97.....	30	hag	Overenn	ar	peoh		
98 - 99.....			Overenn	ar	peoh		
I00 - I0I.....	Iid	ar	binienn				

Troidigeziou aotreet da arnod, ewid
eskopti Kemper ha Leon,
a-berz an Aotrou F. Barbu, eskob Kem-
per ha Leon.

Kemper d'an I0 a viz kerzu I97I

Visant Fave, eskob skoazelle

I02.....	SALMOU	gand	Mab	an	Dig	-	salm	I8
I03.....	salm	42						
	salm	47						
I04.....	salm	50						
I05.....	salm	84						
	salm	87						
I06.....	salm	89						
I07.....	salm	90						
I08.....	salm	93						
I09.....	salm	94						
	salm	96						
I09 bis.....	salm	I36						
IIO.....	salm	97						
	salm	99						
	salm	I09						
III.....	salm	II6						
	salm	II7						
	salm	I29						
II2.....	salm	I20						
	salm	I2I						
II3.....	salm	I22						
	salm	I40						

+++++

Goulennit KOMZ DOUE EN OVERENN

T (30 lur)

B (20 lur)

digand Job Seite - skol am aod - 29249 Guissény

C. C. F. I738 - 66 Rennes

I5 lur: Koumanant d'ar haierou.

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Aotrou Doue, dre ho Mab diskennet da gemer on natur ha da houzañv ar maro,
roit d'ho pugale fidel eul levenez paduz,
ha goude beza on dieubet diouz sklavaj ar pehed,
grit deom beza eüruz da viken.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken. AMEN!

WAR AR PROVOU

Ar zakrifis ez eom da ginnig deoh, Aotrou Doue,
grit ma walho ahanom, ha ma kaso ahanom, a zeiz da zeiz,
d'ar Rouantelez e-leh ma vevim ganeoh.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN!

GOUDE AR GOMUNION

Bet deom bremañ a-fonn eun donezon ken kaer, Aotrou Doue,
e teyom d'ho pedi; grit ma teuo deom diwarni frouez evid or zilvidigez,
ha ma n'ehanim morse da gana ho meuleudi.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

+++++

XV ed SUL WAR AR BLOAZ

PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, c'hwi a ro d'ho tud dianket sklerijenn
ho kwirionez, evid ma hellint distrei war an hent mad;
grit da gement hini a zoug an ano a gristen,
trei kein d'ar pezh na zere ket ouz an ano-se,
hag heulia ar pezh a zere outañ.
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll-viskoaz da virviken .

AMEN !

WAR PROVOU

Taolit ho sellou, ni ho ped, Aotrou Doue,
war ar provou a ginnig deoh an Iliz ouz ho pedi;
grit d'ho tud fidel, o vond da reseñ ar provou-se,
mond atao war santellaad,
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

P'on-eus resevet ar Zakramant, ni ho ped, Aotrou Doue,,
grit ma kresko ennom, beb tro ma lidom ar Mister-se, ar frouez a zilvidigez.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

+++++

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Aotrou Doue, bezit madelezuz evid ho tud fidel,
 ha magit enno ar feiz, an esperañs hag ar garantez,
 evid ma vint aketuz da vired ho kourhemennou.
 Dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll-viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU

Aotrou Doue, gand Sakrifis ar Groaz,
 c'hwi ho peus savet, e-leh sakrifisou liez-seurd al Lezenn Goz,
 ar Sakrifis parfed ha nemetañ;
 resevit digand ho tud fidel provadenn ar Zakrifis-se,
 ha skuillit ho pennoz, evel gwechall war provou Abel,
 evid ma talvezo da zilvidigez an oll, ar pezh a ginnig deoh peb unan.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Pedom a-unan...

Aotrou Doue, chomit tost d'ho pobl,
 rag hebdoh e kouez ar vuez en he foull,
 lakit da dremen dre eur vuez nevez
 ar re ho peus galvet da nacud sakramanchou ho Rouantelez.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

+++++

XVII ed SUL WAR AR BLOAZ

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

C'hwi 'zo, Aotrou Doue, divennour an dud a esper ennoh,
 hag hebdoh n'eus netra nerzuz, netra santel,
 skuillit stank warnom grascu ho madelez,
 ma hellim, ambrouget ganeoh, ober seurd implij euz madou tremenuz ar bed-mañ,
 ma hellim dija beza krog e madou peurbaduz ar bed all.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll-viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, digemer ar provou-mañ,
 deuet deom diwar ho largentez;
 Mister santel an Overenn, a vo grêt dre nerz ho kras,
 ra lako ahanom da vev santelloh er vuez-mañ
 ha da hounid eürusted, perubaduz ar bed all.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Pedom oll a-unan...

Kemeret on-eus perz, Aotrou Doue, er Zakramant santel,
 a verk evid atao ar zoñj euz Pasion ho Mab karet:
 grit ma talvezo d'or zilvidigez an donezon-mañ,
 roet deom gantañ e-unan en e garantez heb par, En, on Doue, beo
 ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll-viskoaz da virviken.

AMEN !

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Bezit skoazell ho servicherien, Aotrou Doue,
ha skuillit bepred ho madelez war ar re 'zo ouz ho pedi;
pa'z int laouen o kaoud ahanoh da Grouer ha da Vestr,
roit dezo a-nevez donezonou ho karantez,
hag o mirit e stad vad.
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan;
a oll-viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU

En ho trugarez, Aotrou Doue,
plijet ganeoh santellaad ar provou-mañ,
ha goude beza digemeret ar brovadenn euz Sakrifis or Zalver,
lakit ahanom e stad da veza, ni ivez, eur brovadenn beurbaduz d'ho kloar.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

D'an dud a vagit gant ar Bara euz an Neñv,
roit bepred ho skoazell, Aotrou Doue,
pa n'ehanit ket da donna o halonou,
grit dezo beza din euz ar zilvidigez peurbaduz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

+++++

XIX ed SUL WAR AR BLOAZ

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
c'hwi hag a gredom pedi en eur lavared dech "OM TAD",
lakit da vad en or halonou, ar spered
a ra ahanom gwir vugale dech,
evid ma hellim kacud perz en heritaj prometet.
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll-viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, digemer provou hoh Iliz;
roet ho-peus anezo deom evid o hinnig dech,
ha c'hwi eo, dre nerz ho kalloud,
a ra dezo trei da veza sakramant or zilvidigez.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Pedom oll a-unan...

Ar gomunion on-eus grêt, Aotrou Doue,
a reseo ho tonezon er sakramant,
ra dalvezo deom da veza salvet ha da veza starteet,
e sklerijenn ho kwinionez.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Aotrou Doue, evid an dud ho kar,
 ho-peus prepart madou ne weler ket:
 skuillit ho karantez en or halonou,
 evid ma karim ahanoh bepred ha dreist peb tra
 ha ma hounezim an eürusted a brometit
 hag a zo en tu all da beb c'hoant.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, digemer ar provou,
 a reom ganto eun eskemm a n'eus ket e bar;
 pegwir, diwar ginnig ar pezh 'zo bet roet deom ganeoh,
 c'hwi hoh-unan eo a resevim.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Pedom asamblez...

Bremañ, p'on-eus resevet or Zalver, er Zakramant,
 emaoñ stouet izel da bedi ho madelez, Aotrou Doue,
 grit deom tenna dezañ atao gwelloc'h er bed-mañ,
 evid kaout perz gantañ e gloar ar Baradoz,
 Eñ, on Doue,
 beo a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

+++++

XXI ed SUL WAR AR BLOAZ

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Aotrou Doue, c'hwi a lak an oll gristenien
 da gaoud ar memez bolontez,
 grit deom kared ho kourhemennou
 ha c'hoantaad ar madou a brometit,
 hag evelse, tra ma vez traou ar bed-mañ o trei hag o tistrei,
 chom heb distaga or halonou euz bro ar wir levenez.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU

Aotrou Doue, dre Sakrifis or Zalver, grêt eur wech evid mad,
 ho-peus prenet an dud, da veza pobl ho pugale;
 plijet ganeoh, en ho madelez,
 rei deom gras an unaniez hag ar pech en hoh Iliz.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Pedom asamblez... Ho pedi a reom, Aotrou Doue, ma teuo ho trugarez,
 d'or para da vad ha gri'ahanom seurt kristenien atao war wellaad,
 ma hellim plijoud deohe peb tra. DRE Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...
 Doue gallouduz, diganeoh e teu peb donezon peurvad:
 sankit don en or halonou ar garantez evid hoh ano,
 magit ar pezh a zo ar wella ennom,
 en eur startaad on liammou ganeoh,
 beillit warnom gand evez ha mirit kement a vo bet maget ganeoh.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Aotrou Doue, ra lako bepred ar Zakrifis Santel
 da ziskenn warnom ar vennoz a zilvidigez,
 evid ma teuo da vad en or buez ar pezh a vez grêt en Overenn,
 dindan spesou ar Zakramant.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

GOUDE AR KOMUNION

Pedom oll a-unan...
 Maget om bet ouz an daol zantel,
 gand ar Bara euz an Neñv,
 hag ho pedi a reom kaloneg, Aotrou Doue:
 pa 'z eo ar Zakramant-mañ magadur a garantez,
 ra zigaso nerz d'or halonou,
 evid ho servicha en or breudeur.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

XXIII ed SUL WAR AR BLOAZ

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...
 Aotrou Doue, dre ho karantez evid an dud,
 om bet prenet ha greet bugale deoh:
 sellit eta gand madelez ouz ho pugale garet,
 evid ma hello ar re a gred en or Zalver,
 beva e gwir frankiz, er bed-mañ
 ha gounid an heritaj peurbaduz.
 Dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Aotrou Doue, mammenn ar garantez hag ar peoh gwirion,
 grit da genta, ni ho ped,
 ma hellim hoh enori evel m'eo dleet,
 dre ar brovadenn-mañ,
 ha grit ivez ma vezim unanet en or menozieu,
 gand ar memez feiz, en eur gemer perzh en Overenn zantel.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

GOUDE AR KOMUNION

Pedom Doue... D'ho kristenien fidel, Aotrou Doue,
 roit dalhmad magadur ha buez koulz dre ho komzou ha dre Za-
 kramant an Aoter: grit dezo en em vataad euz donezonou ken braz ho Mab karet, evid
 beza lodek en e vuez bepred. Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Taolit ho sellou warnom, Aotrou Doue, Krouer ha Rener peb tra:
 hag, evid m'anavezim ar vad a ra ho trugarez evidom,
 grit deom en em rei a greiz kalon d'ho servicha.
 Dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo, ganeoh
 ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU

Selaouit gand madelez or pedennou, Aotrou Doue,
 ha grit digemer vad da brovou ho servicherien,
 evid ma vo ar pez a ginig peb unan d'hoh enori,
 talvouduz evid silvidigez an oll.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Pedom oll a-unan...

Ho pedi a reom, Aotrou Doue, ma teuio vertuz ar Zakramant
 da garga ahanom, korv hag ene,
 evid ma vo renet gand gras ar Zakramant-se.
 kentoc'h eged gand or menozioù on-unan.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

+++++

XXV ed SUL WAR AR BLOAZ

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Aotrou Doue, an oll gourhemennou euz ho Lezenn
 ho-peus dastumet en unan: ho kared c'hwi ha kared an nesa;
 grit deom heulia mad ho kourhemennou,
 ha gounid evelse ar Vuez peurbaduz.
 Dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo, ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, digemer gand madelez,
 provou ho pugale gristen:
 ar pez a reont hag a anzavent en overenn gand devosion ha feiz,
 grit ma resevint ar frouez anezañ dre ar Zakramant euz an Neñv.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Pedom oll a-unan...

Aotrou Doue, pa zegasit nerz nevez deom, dre ar gomunion,
 kendalhit d'or skoazella bepred gand madelez,
 deom da reseo frouez ar zilvidigez,
 en or buez penn-da-benn koulz hag en Overenn.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

+++++

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Aotrou Doue, o kaoud truez hag o pardoni,
e tiskouezit ar gwella ez oh oll-halloudeg;
skuillit eta, muioh-mui, ho trugarez warnom,
ha grit deom kerzed, gand mall, war hent ho promesaou,
da hounid on lod e madou ar Baradoz.
Dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue, beo, ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Doue trugarezuz,
ober digemer vad d'ar brovadenn-mañ a ginnigom deoh,
ma tarzo diwarni, evidom, mammenn an oll hrasou.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Pedom oll a-unan...

Aotrou Doue, ra vim renevezet korv hag ene
gand ar Sakrifik Santel;
goude beza kemeret perz e Pasion or Zalver,
en eur lida an Overen gand ar zoñj euz e varo,
grit ma vim lodeg gantañ ivez e gloar ar Baradoz.
Eñ, on Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

+++++

XXVII ed SUL WAR AR BLOAZ

PEDENN AN DIGOR

Doue oll-halloudeg ha peurbadel, ken brokuz en ho madelez,
ma roit d'an dud ho pèd en tu all d'o meritou ha d'o goulennoù,
skuillit warnom ho trugarez,
koulz evid pardoni kement a zo o poueza war or houstiañs
hag evid rei deom ar madou ne gredom ket goulenñ.
Dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue,
digemer ar Zakrifik savet diwar ho kourhemennou
ha dre ar Misteriou sakr a fell deom lida,
hervez ar garg roet deom euz ho perz,
lakit da ziskenn ennom ar grasou a zantelez,
gounezet gand or Zalver ouz or prena.
Eñ, on Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Pedom oll a-unan...

Ho pedi a reom, Doue oll-halloudeg,
gand ar Zakramant on-eus bet,
grit ma vo torret deom sehed ha naon on ene,
ha ma teum da veza unan gand an Hini a resevom evid or magadur.
Dre Jezuz Krist, or Zalver

AMEN !

PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue,ra zeuio deom ho kras
 dalhmad araog ha da heul peb ober,
 ma vim douget ganti bepred d'an oberou mad.
 Dre Jezuz Krist,ho Mab hag on Aotrou,
 Doue,beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh,Aotrou Doue,digemer pedennou ho tud fidel,
 war eun dro,gand provadenn ar Zakrifis,
 evid ma talvezo deom an ofis-mañ,lidet gand gwir devosion,
 da erruoudun deiz e gloar an Neñvou.
 Dre Jezuz Krist,Or Zalver.

AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Aotrou Doue,uhel dreist peb tra,
 ho pedi hag aspedi a reom,
 evel ma vagit ahanom gand korv ha gwad or Zalver,
 grit deom ivez kacud perz en e natur Doue.
 En, on Doue,beo ha leun a hloar,
 a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

+++++

XXIX ed SUL WAR AR BLOAZ

PEDENN AN DIGOR

Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
 roit deom ar hras da ouestla deoh or bolontez bepred,
 ha da zervich ho hloar gand eur galon leal.
 Dre Jezuz Krist,ho Mab hag on Aotrou,
 Doue,beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh,Aotrou Doue,ma kinnigim deoh a wir galon
 ar provou-mañ on-eus bet diganeoh;
 gwalhet gand ho kras,ra vim santelleet,
 dre ar Misteriou a gemerom perz enno.
 Dre Jezuz Krist,or Zalver.

AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Pedom oll a-unan...
 Grit deom,ni ho ped,Aotrou Doue,
 tenna or mad euz an aketuz ma'z om da dostaad ouz traou an Neñv,
 a vim sikouret evid traoù ar bed-mañ,
 ha ma vo digoret deom or spered da draou ar bed-all.
 Dre Jezuz Krist ,or Zalver.

AMEN !

+++++

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Doue holl-halloudeg ha peurbadel, kreskit ennom ar feiz, an esperañs
hag ar garantez;
hag, evid ma hellim kaoud perz er pezh a brometit,
grit deom kared ar pezh a hourhemennit.
Dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue, boe ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR RPOVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue,
taoler euz zell a vadelez
war ar provou a ginnigem deoh;
ra dalvezo ar zakrifis lidet ganeom-ni, ho servicherien,
dreist peb tra evid ho kloar.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Pedom oll a-unan...
Ni ho ped, Aotrou Doue, ra zeuio ho sakramanchou
da zigas da vad evidom ar hras a zo enno;
ar pezh a lidom bremañ dindan spesou ar Zakramant,
grit ma welim anezañ, eun deiz e gwirionez.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

OVERENN AR PEOH

PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, C'hwi hag a ro c'hoantaad ar pezh 'zo santel,
dibab ar pezh 'zo just, ober ar pezh 'zo mad,
roit ar peoh d'ho servicherien, an hini n' hell ket rei ar bed.
Ra vo or halennoù stag ouz ho kourhemennou
hag on amzer heb aon rag brezel,
evid deom beva dienkrez, diwallet ganeoh.
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue, boe ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU

Aotrou Doue, C'hwi ha ne lez morse an droug da ziskar
ar re a lak o fiziañs ennoh, bezit ar vadelez
da zigemer provou ha pedennoù hoh Iliz;
ra zeuio ho karantez da rei deom ar peoh.
A VIE AR bobl kristen diouz peb anebour.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Aotrou Doue, C'hwi hag a ro ar peoh hag a gar ar peoh,
hoh anavezoud a zo beva, ho servicha 'zo ren;
diwallet eneb peb brezel ar re en em erbed ouzoh
ha pegwir e lakom or fiziañs ennoh, grit deom beva dienkrez.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

LENNADENN GENTA

Lennadenn euz Levr Zakariaz 9/9-10

9. Lez da galon da dridal, merh Sion,
 ha te, merh Jeruzalem laosk youhadennou a ioa,
 ema da Roue o tond war-zu ennout,
 eur roue leal, gantañ an treh,
 humbl hag azezet war eun azenn, eun azenn yaouank.
10. Kas a ray kuit ar hirri brezel euz Bro Efraim,
 hag ar hezeg euz kêr Jeruzalem.
 Torret e vo gantañ ar wareg brezel,
 hag embannet ar peoh e peb bro,
 eñ a reno euz eur mor d'egile,
 euz ar Ster beteg ar penn Pella euz ar bed.

SALM 84 9, II-12, 13-14

DISKAN Ar peoh evid e bobl,
 setu komzou Doue (9b)

9. Selaou a rin petra 'lavarao Doue, an Aotrou;
 ar peoh evid e bobl, setu e gomzou.
11. Madelez ha gwirionez a ya an eil da gaoud eben,
 justis ha peoh d'en em vriata;
12. Ar wirionez a ziwano euz an douar hag euz an neñv e stouo ar justis.
13. An Aotrou Doue a zigaso eürusted hag an douar a zougo e frouez.
14. Ar justis a gerzo en e raog, hag a zigoro hent d'ar zilvidigez.

EIL LENNADENN

Pennad euz Lizer an Abostol Sant Jakez 3/13-18

13. Va breudeur,
 ha bez 'ez eus en ho touez eun den fur hag avized mad ?
 Ra ziskouezo dre eur vuez vad eo renet e oberou
 gand an douster a zav diwar ar furnez.
14. Hogen, m'ho-peus en ho kalon gwarizi c'hwero
 ha ma'z oh troet gand an tabud,
 n'it ket da fougeal na da zispenn ar wirionez dre ar gevier.
15. Seurd furnez ne ziskenn ket euz an neh;
 douarel eo, loerel ha diaouleg.
16. Va breudeur, diwar gwarizi ha tabud,
 e sav dizurz ha droug a beb seurd.
17. Er hontrol, ar furnez euz a Zoue a zo, da genta, divlam,
 ha diwar-ze, troet gand ar peoh hag an douster, êz da veva,
 leun a drugarez, puill a frouez mad,
 n'eo ket aheurtet a-eneb den, leal gand an oll.
18. Er peoh eo e vez taolet an had a zoug frouez eur vuez vad,
 evid ar re a vir peoh.

ALLELUIA

Eüruz ar re a gar ar peoh;
 anvet e vezint bugale Doue.

Maze 5/9

AVIEL

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Vaze.

5/20-24

20. M'hel lavar deoh,ma n'eo ket brasoh ho justis
eged hini ar Skribed hag ar Farizianed,
ne deoh ket da Rouantelez an Neñv.
21. Klevet ho peus ez eus bet lavaret d'on tud koz:
" Na lazi ket,an hini a lazo
henn devezo da respont dirag al lez-varn.
22. Mad,me lavar deoh,an neb en em lakaio e kounnar
a-eneb e vreur a ielo dirag ar barner.
An hini a lavaro gwall gomzou d'e vreur
a ielo dirag ar huzul braz.
Kement hini a lavaro malloz d'e vreur
a ielo d'an tan goude e varo.
23. Pa vezi o vond da gas eur prov d'an Templ,
ma teu da zonj dit ez eus eun dra bennag etrezout hag eun all,
lez aze da brov ha red da genta d'en em gleved gantañ.
Goudeze,deus da rei da brov.

AVIEL ALL

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Vaze.

5/38-48

38. Jezuz a lavar d'e ziskibien bodet en dro dezañ:
" Gouzoud a rit e vez lavaret:lagad evid lagad,dant evid dant.
39. Mad ! me 'lavar deoh:ne enebi ket ouz an den fallakr,
er hontrol,tro da jod kleiz ouz an hini a sko ganez war da jod deou.
40. Ma fell dezañ ober proses dit,evid kaoud da zae,
lez gantañ ivez da vantell.
41. Ma teu unan bennag da ober dit mond gantañ epad eun hanter-leo,
chom gantañ epad eul leo penn-da-benn.
42. Ro da neb a houlenn.
Ne dro ket kein d'an hini a houle! diganez presta dezañ.
43. Klevet ho peus e veze lavret:karit ho nesa ha kasañt hoh enebour.
44. Med me lavar deoh:karit hoh enebourien
ha pedit evid ar re ho peus da houzanv ganto.
45. Evid beza evelse gwir vugale d'ho Tad a zo en Neñv,
eñ hag a ra d'e heol para war an dud fall koulz ha war ar re vad
ha d'ar glao koeza war an dud 'zo santel
koulz ha war ar re n'int ket.
46. M'ho peus karantez evid ar re ho kar,
peseurt digoll a hellfeh da hortoz?
Daoust hag ar publikaned o-unan ne reont ket kemend all?
47. Ma ne zaludit nemed ho preudeur,
petra a zisheñvel a rit ?
Ar baianed zoken a ra kemend all.
48. Ba vo peurvad ho madelez evel m'eo peurvad ho Tad a zo en Neñv.

+++++

Setu amañ, da skouer, ueul lid a binijenn ~~hag eur bedenn evid ezommou an oll~~

ARACG KOVEZ

Kan-digor: Eun Doue a zeu d'ho kervel

Ar beleg : An Aotrou Doue ganeoh ! Ha gand ho spered !

Va breudeur, an abostol sant Yann a skriv kement-mañ en e lizer kenta:
" Ma lavarom n'eus pehed ebed ennom e faziom ha n'ema ket ar wirionez ganeom...
Med ma teuom da añzav or pehejou, an Aotrou Doue, hag a zo mad ha gallouduz, a hell
pardoni deom or pehejou hag or gwalhi euz kement loustoni a zo war or houstiañs."

Chomom sicul eur pennadig, evid soñjal douch e afer vraz or zilvidigez...

Pedom oll asamblez...

Ni ho ped, Aotrou Doue, selaouit or pedennou.
Gouzoud a rit ez om peherien.
Ho pezit ar vadelez da rei deom ar pardon hag ar peoh.
Dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

Selaouom bremañ eur pennad euz an Aviel Sant Vaze: V/2I-24

Jezuz a lavare d'e ziskibien:

" Gouzoud a rit erved ez eus bet lavaret d'on tud koz:
" Ne lazi ket, rag an neb a lazo a vo barnet ha kastizet gand al lez-varn.
Me avad a lavar deoh:
" Kement hini en dezo kounnar ouz e vreur a vo dleet dezañ beza kastizet
gand al lez-varn.
An n' a lavaro d'e vreur: penn skañv ! a vo barnet gand ar huzul-meur.
An neb a lavaro dezañ: penn foll ! a vo kastizet dre an tan.
Evelse 'ta, ma teuez da zigas da brov d'an aoter,
ha ma teu da zoñj dit e-neus da vreur eun dra bennag a eneb dit,
lez eno da brov dirag an aoter, ha kerz da genta d'ober ar peoh
gand da vreur, ha goudeze neuze, deus da ginnig da brov.

MEULEUDI da Jezuz Krist, en e Aviel Santel !

Taolom eur zell bremañ war or houstiañs,

ha gwelom gand lealded or pehejou... Pardon a houlennom digand Doue en eur gana,
beb tro an diskan-mañ:

Aotrou Doue madelezuz, ho-penstruez ouzom !

1/ Aotrou Doue, neubeud a garantez on-eus bet evidoh alies. Nag a zeveziou penn-da-benn
on-eus tremenet heb soñjal en ho madelez, troet gand aferiou ar bed...

2/ Aotrou Doue, na ped gwech n'on-eus ket hoh aravezet er paourra pe en disterra euz or
breudeur. Ped gwech c'hoaz on-eus nahet taoler evez ha digeri on daoulagad da zelled
ouz ar re o-doa ezorm ahanom, ha n'on-eus graet netra dre feneantiz, dre leziregez...

3/ Aotrou Doue, c'hwi a oar n'on-eus ket digemeret or poaniou, on trubuilhou, n'on-eus
ket komprenet e hellent beza on lod deom-ni e Pasion or Zalver, evid sikour savetei
ar bed; kentoh eged o digemeret a galon vad, om marteze en em zavet ouzoh gand kounnar
ha nalloz...

4/ Aotrou Doue,
ped gwech n'on-eus ket bet nerz-kalon awalh da enebi ouz on techou fall, ouz or
yolou fall a zo beo ennom; ped gwech ivez marteze on-eus bet roet skouer fall dre or
homzou, on oberou, or buez; om bet kristenien klouar, disleal, treitour da Zoue, d'an Iliz;
tud kristena-ziañvez nemed-ken, kristenien faoz en o buez...

5 / Aotrou Doue, ni zo bet alies tud dail, o redek hag o klask re alies plijadurioù hag eürusted ar bed-mañ, o talher marteze stag or halon ouz an danvez, an arhant, al lorchentez, o vankoud d'al lealded, d'ar justis marteze, da lezenn ar vuez...

6 / Aotrou Doue, ped gwech on-eus lezet a-goztez on deverioù, heb en em renta kont euz pouez ha talvoudgezh or harg:er familh, er skol, er barrez, war an dachenn a labour on lakeet gand Doue...

AR GOVESION

Evid er pehejou oll, re or buez a-bez,
goulennom pardon digand Doue, en eur lavared a-greiz kalon:
" Me a govez..."

Plijet gand Doue oll-halloudeg kaoud trugarez ouzom, pardonit deom or pehejou,
ha kas ahanom d'ar vuez peurbadel. AMEN !

Ra vo or Zalver Jezuz Krist en ho kalon ha gand ho spered, evid daoh koves ho pehejou
ou gand lealded ha fiziañs. En ano an Tad hag ar Mab hag ar Spered Santel. AMEN !

En em lodennit bremañ etre ar veleien a zo en iliz.

Er gador-goves, d'ar beleg lavarit hebken:

1/ abace peur n'oh ket bet o koves.

2/ ha diouztu, ho pehejou,

ha goudeze deuit endro d'ho plaz evid ober asamblez ar binijenn
ha renta gloar ha bennoz da Zoue.

GOUDE AR GOVESION

Pasion or Zalver Jezuz Krist, meritou ar Werhez gloriuz Vari ha re an oll Zent,
kement vad a reoh ha kement droug ho po da houzañv,
ra dalvezint deoh da gaoud pardon d'ho pehejou,
da greski buez ar hras ennoh ha da hounid ar Baradoz. AMEN !

E-giz pinijenn, da beb hini ahanoh dibab ar binijenn a gavoh ar gwella
evidh evid merka ho keuz da genta, ho hoant hag ho menoz da veza hiviziken muioh
fidel ha feal da Jezuz Krist:

pe dre eur bedenn a reoh goudezo,
pe dre eun dra bennag all.

Remtom bremañ bennoz ha trugarez da Zoue evid e vadelez en or heñ-
ver:

An Aotrou Doue ganeoh ! ha gand ho spered !
Ho kalon d'an uhel ! troet eo warzu Doue !
Lavarom bennoz da Zoue, en Aotrou ! just ha santel eo !

Just ha santel eo, evid gwir, eun dra dleet ha talvouduz, lavared deoh
on trugarez, Tad Santel, e peb loh hag e epb amzer, dre Jezuz Krist, ho
Mab karet.

C'hwi eo on Doue, n'eus nemetañ, beo ha gwirion, c'hwi a zo a-oll wis-
koaz hag a vo da viken, ken skeduz ha sklerded ma'n eus lagad ha
spered ebed gouest d'ho gweled, Doue leun a vadelez, mammenn a vuez,
c'hwi ho-peus krouet ar bed evid skuill ho pennoz war ho krouadur-
ien ha laouennaat kalz anezo gand ar sked euz ho sklerijenn.

Ho mouli a reom, Tad Santel, rag c'hwi 'zo braz hag an oll oberou ho-
peus grêt 'zo diwar furnez ha karantez. Kement ho-peus karet ar bed,
Tad Santel, m'ho-peus digaset war an douar, pa oa deut an amzer, ho Mab
deoh-hwi, evid beza or Zalver, en em hrêt den dre nerz ar Spered Santel,
ganet euz ar Werhez Vari, e-neus renet buez mab-den e peb tra no-
med ar poched: d'ar re baour e tigase kolou mad ar zilvidigez, d'ar
re a oa er jadennou, o frenedigez, d'ar re a oa glaharet, levenez o ha-
lon. Selaouit bremañ or pedenn, Ao. Doue, gand sikour ho Mab ha skleri-
jenn ar Spered Santel: ra vo kaer ha frouezuz or buez!

Da echui : O kalon Zakr...

S A L M O U

gand Mab an Dig

SALM 116

Va dalhit, va Doue !

Va dalhit, va Doue ! Fiziañs am-eus ennoh.
C'hwi a zo va Aotrou. Eurvad ebed hebdoh.
Ar zent a vev em bro a zo va gwir vistri;
Aketuz on bepred d'o selaou, da zenti.

Kreski a reont dalhmad o foan hag o anken
ar re a gerz da heul fals-doueou estren.
Ne zin ket evel do d'en-em walhi er gwad,
Ne zin ket d'o meuli. Re druezuz o stad!

An Aotrou, va leve ha va haliñ ive.
He derhel a ray din, va lodenn a leve!
P'eo bet tennet ar plouz, nag ez-on bet laouen,
O, ya ! Na pegen kaer eo din-me va lodenn!

Bennoz deoh, va Doue, evid ho kuzulioù,
zoken epad va housk, me a gan ho salmou.
Bepred emach aze, e va hichen, Doue,
Evid va skoazella. Me ne gouezin morse.

Va halon 'zo laouen, a drid a levemez,
ha va horv e-unan a ziskuilz heb enkreñ,
Rag c'houi ne lezot ket va ene d'en em goll.
O tra ! C'hwi hem dalho eneb an avel foll.

C'hwi a zesko din-me hent fur ar wirionez,
Ganeoh eo e kavin da viken ar vuhez.

SALM 118

Da Zoue eo ar bed...

Da Zoue eo ar bed, an oll draou 'zo ennañ.
Da Zoue an douar, an dud a vev warnañ.

Gand Doue eo savet war fount an oll vorioù,
gantañ diazezet e kreiz an oll sterioù.

War menez an Aotrou piou a hello sevel,
piou a yelo da jom en e balez santel ?

An neb 'zo chomet glan e zaouarn, e galon,
Hag a zo bet atao, izel, leal, gwirion.

Hennez eo a vezo benniget gand Doue,
Ar Zalver truezuz a zalho e ene.

Setu ouenn ar re a glask hent an Aotrou,
hini Doue Jakob, en oll wenojennou !

Piou eta eo hennez an Doue ken skeduz ?

An Aotrou, an Dibaod hag an oll-hallouduz,
An Aotrou ne gren ket en emganm strafuilluz.

Piou eta eo hennez an Doue ken skeduz ?

An Aotrou, ar Mestr braz war armeou spontuz.
Setu aze piou eo ar Roue ken skeduz ?

SALM 42

Bezit mad em heñver, ho pet truez ouzin,
C'hwi a zo va oll nerz. Na respontit ket din,
Va halon 'zo glazet. N'eus den d'am skoazella!

Digasit ho sklerder evid ren va ene.

D'ar meneziou santel ha da houndor ho ti.
Ha me 'zavo neuze da aoter, va Doue,
Doue va youankiz, Doue leun a zudi!

Me ho kano Doue. Ya, bepred, va Aotrou.
Perag koll nerz-kalon, perag, o va ene ?
Bez fiziañs e Doue! Va oll meuleudioù
da viken m'o haso beteg tron va Doue !

SALM 47

Braz-kenañ eo Doue. Kan dezañ, va halon,
nag eo kaer e venez, e kêr-benn om Doue,
Levenez ar Bed-oll. Setu menez Sion,
A zav e gern uhel e kêr-benn or Roue!

Diskouez a ra e nerz em e gêriou brudet;
Tri Roue a zeuas, unanet, da zailla.
Med pa weljont ar gêr, e chomjont sebezet,
Redek a rejont kuit, o zri, en eur grena!

Poam gwragez a zoug! Gand avel ar reter,
Listri, bagou Tarsiz, evel di 'zo skubet.
Ar pezh on-oa klevet, ni her gwelas ken sklêr,
Doue an Armeou! Gantañ barreg, bepred!

C'hwi 'zo bet truezuz on ho Templ evidom,
Hoh ano 'zo brudet hag am oll zouarou
A gam ho meuleudi! Beillit bepred warnom,
Doue a lealded, deoh-c'hwi oll or soniou!

Menez Sion a drid, dispar e levenez,
gwragez Sion a gam kaerder o menezioù!
O! sellit ouz Sion, kelhiet oll a nevez.
Ne heller ket komta miver braz he zourioù.

Gwelit 'ta penaoz eo difennet Sion,
Gwelit he nerz dispar, 'vid ma hellot goude
Meuli d'ho pugale galloud ar Mestr gwirion,
Da viken or Rener, da viken om Doue !

Bezed truez ouzin hervez ho madelez!
 Doue a drugarez, pardonit va fched!
 Gwalhit va ene paour ! Doue bezed truez,
 Kalluz on dirazoh ! Pardonit va fched!

Eneb deoh on savet ha grêt em-eus am droug.
 C'hwi a varn atao gand ar wir lealded.
 Ganet on er pehed ha wa gwad eo am doug.
 Sammet on bet gantañ adaleg m'on er bed.

O Doue! C'hwi a gar ar halonou didro,
 hag e strad va ene, me a glev ho mouez.
 Lakit louzou houez-vad e va halon endro;
 gwennoh eged am erh va rentit a-mevez!

Ha grit d'ho servicher klevout komzou a beoh,
 ma trido an eskern ho-peus, c'hwi, bruzunet!
 Pardonit, wa Doue! M'her goulenn diganeoh:
 Va rentit da viken dieub a beb pehed!

Lakit emnon, Doue, eur galon atao glan
 Ha grit da va ene chom bepred er furnez!
 Gand ho spered santel, bremañ e valean.
 O, bezit evidon karget a vadelez!

Roit din adarre ho kwir silvidigez,
 Ha war am hent bepred grit din beza nerzuz!
 D'an dud difeiz e-zin da gas ar wirionez;
 'Wid am oll beherien, c'hwi wo trugarezuz!

Euz all lezenn ar gwad, o, ra vin dieubet!
 Va Zalver me 'gano ho spered a beoh,
 Rag c'hwi ne garit ket ar gwad a zo skuillet.
 Ha m'her skuilfen, Doue, ne blijfem ket deoh!

Ar pez a ginnigan eo va halon doaniet.
 Eur galon vruzunet. O! na rit ket a fae!
 Bezit mad em heñver! Savit ho kêr garet,
 Sion, hag adsavit Jeruzalem, Doue !

Neuze, c'hwi a hello, Aotrou, or gwir Zalver,
 benniga or provou 'wid meuli hoh amo !
 Gand gwad an ejenned 'wo gwalhet an aoter.
 En ho Templ a-mevez, c'hwi on digenero!

Dre hoh An Santel, Doue, va savetaït!
 Ha dre ho kalloud meur bezit mad em heñver.
 Va fedemnou a zav davedoh. Selaquit
 Va hlemmou glaharuz, din-me paouez peher !

Tud estren 'zo bodet eneb din, a beb tu,
 Tud gallouduz am hlask! Ne gredont ket emmoh.
 Deuit d'am skoazella! Deuit, Doue, dioustu!
 An Aotrou eo a zalh va ene er peoh.

Lakit an droug da vont wardu an cnebour,
 Bezit mad em heñver! Doue, truez ouzin!
 Me a ginnigo deoh va frov, med d'am sikour
 diredit, va Zalver ! Hoh amo a veulin !

C'hwi deu d'am skoazella e va hrisa poaniou.
Gand hoh holl trugarez hoh eus va dieubet.
Kaset ho-peus da get va gwasa ankeniou.
Me 'wel gand plijadur va enebour trehet

SALM 84

Mad oh bet, va Doue, evid ho pro garet,
Ha buez pobl Jakob ganeoh a zo troet;
Kaset ho-peus, Doue, ar pehed anezañ;
Siwaz, ar bobl a-bez a oa taget gantañ!

N'oh ket mui kounnaret eneb dezañ, Doue!
Arabad deoh kaoud droug. Her harit adarre!
Arabad deoh derhel eneb deom ho kounnar,
Na jomit ket, Doue, kantvejou dilavar!

Daoust ha n'o lakot ket da zistrei d'ar vuez,
'vid gwalhi o ene, en eur mor levenez?
Diskouezit deom, Doue, ho kalon hegarad,
grit deom beza salvet en eur heul an hent mad!

Me a selaou bemdez komzou drant va Doue.
Euz ar peoh e komzan 'vid e bobl adarre.
Euz a beoh e komzan evid e dud fidel,
hag evid ar re oll a glask e urz santel.

Tostaad a ra ouzom poent ar zilvidigez
E hloar a dosta ouz an douar bemdez.
Karantez, lealded a-unan a gerzo,
Ar peoh, ar wirionez neuze en em boko!

Lealded en douar, puill, kreñv a ziwano,
ar wirionez en neñv ouzom oll a zello.
An Aotrou c-unan a vo madelezuz.
An ero a roio d'am dud eum cost founnuz.

Ar wirionez a vo lintruz-meur dirazañ.
Hag ar zilvidigez a deuy adreñv dezañ.

SALM 87

O, Aotrou, va Doue, hed an deiz e klemman
Hag en noz davedoh e sav va hirvoudou.
Va selaouit, Aotrou, beb tro m'hoh aspedan,
na jomit ket bouzar ouz va oll goulennoù!

Va ene er boan a zo kalz re zammet.
Emañ echu ganin va buez ken garo.
Me a zo bremañg warnez beza beziet,
Eur paourkez den dinerz, etouez tud varo!

Astennet on er bez, etouez tud lazet,
Maro en hoh eñvor ha ken pell diouzoh.
Doun-kenañ eo an toull om bot ennañ strinket,
Em denvalijenn yen, dilezet ganeoh!

Taolot ho-peus warnon, va Doue, ho kounnar,
A deu evel ar mor da goueza war va hein.
Kaset ho-peus a-bell peb mignon ha peb kar.
Evito on bremañ donjeruz oll, tra vreïn!

Ne hellan ket siwaz mond er mêz ahalen,
va daoulagad 'zo ruz, o ouela em frizon.
Me ho ped, va Doue ! Truez ouz va anken,
va daouarn a zavan wardu enmoh. Pardon!

Evid an ANaoñ e rafot burzudou ?
Daoust ha sevel a raint euz o bez d'ho meuli ?
Ho madelez a ve embannet er beziou ?
Daoust hag ho lealded a vez kanet er pri ?

Daoust hag ho purzudou amañ er vro deñval
a ve anavezet gant korvou eur vered ?
Med me, o va Doue, va hlewit o youhal,
adaleg ar beure, o Aotrou, me ho ped!

Perag, o va Doue, e serrit ho kalon
D'am ene ? O, perag e nahit eur zell din ?
O, paourkez den ma 'z on, yem en anaoñ!
Nag eo spontuz, Doue, ho kounnar stag ouzin.

Evel an tan e teu, oll a-bez, d'am devi.
Va strafuill a zo braz ha me n'on mui netra.
Evel ar mor e teu, hed an deiz d'am beuzi;
An oulqu a zired oll warnon da darza.

Kaset ho-peus a bell peb mignon ha peb kar,
oll ar re a garen ha bremañ ahalen,
ne hellan ket tehoud diouz liamm ho kounnar.
'Wid mignon n'am bezo nemed tenvalijenn!

SALM 89

Pedenn Moyzez

Ennoh on-eus kavet a viskoaz or skor,
Araog m'edo savet ar menezioù uhel,
Araog m'edo ganet am douar hag ar mor,
A vepred, da wiken, c'hwi 'zo, Doue Santel!

C'hwi laka da zistrei an dud endro e pri,
o lavaroud dezo: " N'oh ken ludu, tudou!"
Ha mil bloaz evidoh, ma'z int hir 'vidom-ni
A dremen d'ar red-am, evel an hunvreou!

C'hwi o ren, va Doue, 'vel ma rit d'eur menoz,
'vel ar vleunienn zister a deu gand goulou-deiz,
on em zispak er park hag a varv da serr-moz.
Gand ho kounnar, Doue, ni 'zo spontet, tud keiz !

Kuzet or pehejou dirazoh 'zo ledet,
Or fallagriez zo dirag ho taoulagad.
On derveziou a deuz dre ma 'z oh kounnaret;
Eur bloavez a dremen evel eun huanad.

Deg vloaz ha tri ugent bremañ on-eus bevet
ha da bevar ugent ez eus tud kreñv hoaz,
Med ar halz euz an dud, ganto, a vez brevet.
Tremen a reont gand tiz ! Nijal a reont, siwaz!

Piou a oar ho kalloud, pa vezit kounnaret?
Ni a dle anaoud am doujañs dleet deoh.
Deskit deom konta striz on deizioù tremenet
ha lakaad on ene, e stad vad, e peoh !

Distroit, o Doue ! Beteg peur ?..O, truez
ouzh ho servicherien ! Bezit mad evidom !
Magit or halonou, Doue arugarez !
Al levenez neuze a dregerno ennom.

Grit deom beva laouen kement a zerveziou
Eged a re deñval on-eus bet beteg hen.
Roit deom an eurvad kement a vloaveziou
Hag ar re diwasket en drubuil em anken!

Ra welo ar bed oll oberenn on Doue,
Diskouezit ho kloar, lakit da zispaka
Bleunioù ho madelez warnom, ho pugale!
Grit d'ol labour dougem frouez euz ar puilla.

SALM 90

Te hag a zo dalhmad dindan skoazoll Doue,
o veva e goudor ar Mestr oll-halloudeg;
Gantañ 'vo braz da nerz ha da halloud ive,
Lak ennañ da fiziañs! Gantañ e vi barreg !

Rag eñ da zicubo euz ar rouejou fall,
Ar hleñved, ar vosenn ! E eskell da viro,
A beb tu euz an droug. Bezit dezañ feal
'Zo dougenn dillad dir, n'eus den hag o rogo.

Ne po ket da gaoud aon rag an deñvalijenn,
Na rag an armeou, an arme, na netra.
A vernioù e kouezo an dud en da gichen
Ha te a gerdalho da vale heb kila!

Digor da zaoulagad hag e weli neuze,
Penaos e rank paca ar re a labour fall,
Te az pezo bepred 'vid da zerhel Doue.
Ne pous ket da grena, rag eñ eo da ziwall.

Barrou kriz ar vuez, morse beteg ennout
Ne douint, koumaret, da regi da doltou.
Komenn 'ra d'am elez beilla bepred warnout,
Ha netra ne hellfe ober droug d'az madou.

War o eskell zoken e vezi dougennet,
Da viroud ouz da dreid da steki ouz ar vein.
Te a hello bale zoken war an aerod,
An aerouant, al leon, te yelo war o hein!

" Pegwir e teu d'am heul me 'rank e zavetei
Ha me hen diwallo rag va ano a gar.
Beb tro ma houlenno va skaezell me a deuy,
Me a vezo gantañ bepred en e hlahar.

Me 'gaso dioutañ blaz an oll eñkreziou,
Me leunio e galon gand tan va harantez.
Kreski a rin ive niver e vloaveziou,
Diskouez a rin dezañ deiz va zilwidigez.

Doue ar bae, dervit !
 Doue ar bae, deuit !
 Barner spontuz, savit !

D'am oll dud ourgouilluz paeit o labouriou,
 Beteg peur, o Doue, ar re fall a reno,
 Oh ober gwap ouzom gand o homzou garo
 Hag o vresa ho pobl, o laerez e vadou ?

Laza 'reont ar re baour hag an intanvezed,
 Troha 'reont o gouzoug d'ar paourkez minored !

Foug enno e youhont : " Doue ne wel siseurd ! "

O tud C'ampennet, Doue Jakob ve dall ?
 Peur e teuo skiant deoh eun tammig tud fall ?

Ne heller ket soñjal 've bouzar an hini
 A stagas diskouarniou ouz or pennou deom-ni.
 Penaoz e vije dall ar Hrouer, sebezuz,
 E-neus roet d'an dud daoulagad lugernuz ?

An hini a lak urz e oll vroioù ar bed
 Ha ne gatzize ket ? Eñ a geleñn an oll,
 A oar o memoziou. Gouzout a ra int foll !

Euruz eo an den a gentelioù bepred,
 Gand ho lezenn zantel. En deizioù trubuilhuz,
 E vezo dienkrez, Doue madelezuz !

Da hedal ma vezo toullet bez ar re yud,
 C'hwi, ne zilezot ket ho pobl, o va Doue,
 C'hwi ne zilezot ket biken ho perz leve !

Dizale, c'hwi 'zavo hag a varno an dud
 Hag ho parnedigez 'vo leun a lealded,
 Ar halonou divlamm hen heulio gand aked.

Piou a zavo ganin d'ober brezel d'an droug ?
 Piou a deui ganin, d'en em ganna diousta,
 Eneb ar re a glask ober fall a beb tu ?

Doue a zo ganin. Eñ am skoazell, am doug,
 A hend all e yafen buan d'ar vro denval.
 Beb tro ma horjellan, eñ a deu d'am diwall.

Eleunioù ho madelez warnom, ho pagale !
 Grit d'ol labour dougem frouez euz ar puilla.

Nag oh mad, o Doue ! Pa deu an ankenioù,
 Niveruz da veuzi va halon er glanndour,
 C'hwi zired d'am hichen ! C'hwi 'zo va frealzour !

Daoust hag a du gameoh ema al lezvarnioù,
 Hag a zebiant senti ouz ho lezenn zantel,
 O samma tud leal, o laza tud fidel ?

Doue zo cwidom evel eur hastell kreñv,
Eur roh 'vid va difenn. Steki a ray outo
O fallagriez kriz ! Doue o bruzuno !

SALM 94

Diredit ha kanit, en enor da Yahwe !
Enorom a beb hent, Roh ar Zilwidigez !
Diredom da-vetañ ! Meulom oll hon Doue
Gand ior hanacuennou ! Youhom e garantez !

Nag eo braz on Doue, uz d'am oll doueou !
Eñ eo ar Rener-Meur. Dezañ strad an dounder,
Ha kern ar menezioù. Dezañ an oll vorioù
Hag an douar a-bez, rag eñ eo ar Hrouer !

Diredit, daoulinit ha soubliñ ho pennoù !
Or hrouet en-eus oll. Dirazañ mi 'stouo,
Rag eñ eo on Doue, ni e zenvedigou,
a ren gand karantez. Selaouit hen hizio !

Temerait ho kalon ! Gwechall e Meriba,
Ho tadou 'jomas mud dirag va oberou !
Droug a zavas ennom, eun devez, e Massa.
Na rit ket eweldo ! Selaouit va homzoù !

Epad daou-urgent vloaz, me am eus bet donjer,
Uz eur bobl dizemtuz ha serr-krenn e galon.
E va kounnar outañ em eus roet va ger,
m'eo ket i a yafe e bro ar peoh gwirion !

SALM 96

Yahwe a zo Roue ! Tridit oll tro war dro !
Bazit enezennou a levenez karget !
Eur hommoul mogidell a zo ouz e holo
Ha war al lealded e dron a zo savet.

Dirazañ e vale eun tam sklêr, sebezuz,
O tevi e beb tu e oll enebourien.
Sklerijennet ar bed gand e sked burzuduz,
E weled 'zo eur spont... hag an douar a gren.

Ar menezioù a deuz, e peb leh 'vel koar,
Hag ar bed a embann lealded am Aotrou,
On Doue gallouduz, Rener meur an douar !
Gwelit oll e hloar, o luzerni, poblou !

Hag e chomont mantret ar re oll a grede
E doueou metra ! Stoui 'reont dirazañ.
Sion a zav, a veul ho lealded, Doue !
Merhed yaouank a gan : " Doue n'eus nemetañ ! "

Rag c'hwi, Yahwe, a zo treh d'am douar a-bez,
Dreist an oll doueou ! C'hwi a gar ar re oll,
Ne garont ket an droug. C'hwi a zallh o buez
D'ar re a zo fidel. Ne yelint ket da goll !

Ar sklorijenn a zav evid an dud feal
hag ar wir levenez evid an dud a galon.
Tud fidel, kanit oll d'eun Doue ken loal!
Moulit brud an Doue n'eus nemetañ !

SALM 136

Hirvoud an dud en harlu

E kichen da steriou, ni a oa azecet,
Babylon, hag eno hon daelou 'zo kouezet,
o soñjal e Sion.

Hag ar re on dalhe e kreiz or chadennoù,
A lavaro deom: " Kanit kanaouennoù,
Eur hantig a Sion ! "

Penaoz e yafen-ni en harlu da gana,
En enor da Yahwe, p'emaom oll o ouela,
Ken pell euz a Sion ?

Ra sklaso va daouarn ! Kerkent ouz va stammiou,
Ra vo staget va zeod, ma titez va sonjou
va bro Jeruzalem ?.

E va halon bepred e chomo da genta,
Da wiken e vezo euz a bell ar haera,
Va bro Jruzaem !

Benniget an hini a ray dit paea ker,
Eun deiz, da dorfejou euzuz en or heñver,
Merh daonet Babylon !

Euruz an hini a freuzo da dourioù,
a hello bruzuma penn da vugaligoù,
ouz ar vein, Babylon !

+++++

+++++

SALM 97

Kanit da Yahwe eur hantig nevez,
Grêt en-eus burzudou.
E halloud 'zo braz. Am troh em devez
Atao, Mestr ar boblou!

Er bed e lugerm splann e lealded,
Hag e zilvidigez.
Soñj a deu dezañ e-neus diskouezet
'Wid Izrael, madelez !

An oll dud a wel ar zilvidigez
O tond euz om Doue.
Kanit meuleudi, o! douar a-bez!
Kanit oll da Yahwe!

Bezit laouen-meur! Dezañ kanit 'ta,
war an oll binviou!
Kasit ho mouez, ho sonioù kaera
Beteg tron an Noñvou!

Ra deuiio ar mor ha peb tra emañ,
An oll dud 'zo er bed,
Ar stêr, ar menez, da gana dezañ
Ha d'e vouli bepred!

Oll dirag Yahwe! Setu en o tond,
Evid barn. Ha netra
Ne jomo kuzet. En a zalho kont
E peb den, euz peb tra!

SALM 99

Deuit oll da vouli Yahwe, tud an douar!
Heuliit hen, oll laouen ! Diredit war e dro,
Diredit da gana ho levenez dispar!

Yahwe a zo Doue! Gantañ om bet krouet
Ha ni a zo e bobl. Ya! Dezañ ni a zo
Evel deñvedigou, oll war e dro bodet!

Deuit d'e Dimpl santel! Deuit oll d'e vouli!
Gand kantikou nevez, bonniguit e ano!
Ha Doue a deuiio bepred d'ho frealzi!

SALM 109

Komzou Yahwe da va Aotrou:
"Azezit d'am dehou,
"Ken na vo hoh onebourier
"Dindannoh el lagenn!"

" Me 'gresko ho nerz euz Sion.
 " Divrall e vo ho trom,
 " Epad ma kano an Elez
 " Ouz Roue ar menez.

" Ganet oh araog' goulou deiz,
 " Ganin evel ar gliz.
 " M'hel-lavar hen touet em-eus
 " Ha morse m'em bo keuz."

' C'hwi a zo da viken beleg,
 Evel Melkisedeg.
 A zeou dech e teu an Aotrou,
 Evid barn ar boblou.

Da zeiz ar gounnar e torro
 ar pennou war ho tro,
 E gouer am hent eh evo
 Hag e benn a zavo.

SALM III6

Alleluia !
 Oll vro'lou, da Zoue meuleudi !
 Oll boblou, diredit d'e gana !
 Pegem mad eo bet evidom-ni;
 Atao e teuy d'hor skoazella !

SALM III7

Oll da Zoue, kanit !
 Ya, e vad'ez 'zo peurbaduz !
 Tud Israel, kanit !
 Ya, e vadelez 'zo peurbaduz !

Tud Aaron, kanit !
 Ya, e vadelez 'zo peurbaduz !
 Oll dud fidel, kanit !
 Ya, e vadelez 'zo peurbaduz !

SALM I29

Euz strad an islong, em-eus pedet Doue,
 Va selaouet en-eus, va zennet ahamo.
 Doue a zo ganin hag e hellan bale,
 Heb aom rag metra, o veuli e ano.

Yahwe a zo ganin. En a zo va skoazell;
 Me 'welo rivinet va enebourien kriz.
 Gwellloh eo en em drei ouz va Doue santel
 Eged rei fiziañs da dud hag a zo treiz.

Gwellloh eo en em drei ouz va Doue santel
 Eged rei ar fiziañs da dud 'zo er hargu.
 Poblou tud zo deuet da ober din brezel;
 Me am-eus gand Doue o lakêt a dammou.

Diredet edont oll war va zro 'vel gwenar.
 Setu dor va Doue ! Ar re vad ya dreizi !

Me rento deoh bennoz, a greiz kalon, Doue!
 Da veza diredet evid wa dieubi!
 Ar mêm disprizet gand ar re a zave
 A zo bremañ mêm korn, e diazez an ti.

Yahwe en-eus grêt kement-se evidom.
 O, pegen souezuz labour gaer, on Doue!
 Setu an dervez braz en-eus roet deom,
 Tremenom hem er peoh, el levenez ive!

O Yahwe! roit deom gras ar zilvidigez!
 Diwallit ol labour, on hent hag ol leve!
 Ra vezo benniget an hini a zigouez;
 Ni oll ho pennigo euz a di on Doue!

Yahwe a zo Doue. Skedi 'ra lugermuz.
 Diredit gand lorvez beteg tron an Aoter!
 Meuleudi hag enor d'hon Doue peurbaduz!
 Doue madelezuz bepred en or heñver!

SALM 120

Kantig ar menezioù

Sevel 'ran va zellou
 Wardu ar menezioù.
 Pieu deui d'am diwall
 Euz an cnebour fall?

D' am sikour 'ta, Doue!
 Mestr an douar, an heñv!
 N'am lezo ket er pri.
 Ne hell ket moredi!

Da dreid ne rinklint ket,
 Ne gousk na ne vored,
 Ar pastor mad, santel
 A ziwall Israel!

Hed an deiz, an domnder
 Evidout'vo dister.
 Al loar en noz teñval
 A zavo d'az tiwall.

Doue da ziwallo.
 Heb enkrez te 'vewo.
 Er maez koulz hag em ti
 Dalhot mad e vezi.

SALM 121

El levenez, on bet pa 'z eus lavaret din :
 " Deom oll da balez an Aotrou ! "
 Klask a ran mond pelloh, med a zav e chomin,
 Jeruzalemm, harp en da zorioù!

Jeruzalem a zo savet evel eur gêr,
 Pur gêr renket mad peb tra emni.
 Hag oll bobloù Yahwe a deu a beb amzer,
 Hervez al lezenn d'henn emori.

- III3

Em he hreiz eo savet kador ar varnerien,
Barmerien pobl David, or Roue.
Ra vezo an oll dud hoh enor, heb anken;
Dalhit Jeruzalem, o Doue !

Ra vezo ar peoh bepred er Gêr Zantel!
Med dizale an tan a grogas er boblou.
Evel eur bodad spenn o tevi, o gwelan;
Me am-eus gand Doue o lakeet a dammou.

Ya! Klasket ez-eus bet va lakaad da goueza,
Med Yahwe zo deuet adarre d'am sikour.
En eo a zo va nerz hag a ra din sailla;
Va saveteet en-eus euz dorn va enebour!

A beb tu, e klevan an dud vad o youhal,
O kana meuleudi d'an Doue, gwir Zalver.
E halloud souezuz am sav dreist ar re all.
O! Galloud Doue! spontuz eo ho prazder!

O! nann ne varnin ket! Hoaz me a vevo,
A embanno d'am oll oberou va Doue.
Va hastizet en-eus, med n'eo ket ar maro
En-eus digaset din. Bennoz deoh, o Yahwe!

Palez al lealded, digorit ho toriou!
Me a yelo ennañ, Doue, 'vid ho meuli.
Me 'rento deoh bennoz 'vid ho madeleziou.

Evid va breudeur, va mignonez.
Peoh dezi: Dalhit ho ti euz ar brezel,
Jeruzalem, bez laouen bepred!

SALM I22

Me 'zav wardu ennoh va sellou,
Wardu ennoh, Mestr braz an Neñvou!
Evel daoulagad ar servicherien,
Wardu daouarn ar vistri o ren,
Evel ma sav he re ar vatez
Wardu daouarn he mestrez!

SALM I40

Ouz ar reier, eun deiz, e stoko ar re fall,
Neuze e vo gwelet skiant vad va homzou,
Evel ar sklismou a nij diouz ar vouhal,
O eskern 'vo taolet, a beb tu, en toullou.

Me dro wardu ennoh va daoulagad, Doue,
Ennoh em-eus fiziañs! C'hwi a zo va sikour.
Deuit d'am dieubi! Dalhit mad va ene,
Va diwallit, Doue, euz a beb enebour!

Ne glasker a beb tu nemed va bruzuna,
An dud fall a laka war va hent rouejou,
Med oll, c'hwi o lako dizale da goueza.
Me 'gerzo gand va hent, Doue heb o selaou!